

Mab Mari Gabel

(f° 120)

Mari Gabel ar c'hreg a drou
a ia bemdez var marc'h hamon.

a balamour de mab hevan
na ne deus bugel nemert - han.

ma mab ouzin mar sentet
ar fumelen a zilesfet.

ar fumelen mar dilezan
eun habit neves a rankan

me ranko kaout eur bragou pann
eur justekor troad e rouan.
eur vester vian a zindan
a zindan tout eur rochet voan.

ebarc em zreid eur skarpinou
eur bloukou arc'hant varnezgo

eun tok plumachen var va fen
hag eur rochet voan em c'herchen.

ma lavaroc ar merc'het iaouank
setu akipet ar c'hliant.
setu akipet ar c'hanfard.

7

Moris Follézour 2 janv: 1851.